

AN DAOU VARZ

1

BARZ AR MENEZ.

Barz an Arvor lavar dinne
 Kaer eo da vro 'vel ar mene
 Vel ar menez da c'houlou dels
 Hanter guzet dindan ar gliz.

2

BARZ AN ARVOR.

Mar deo ker kaer o menesiou
 Da vintin gand ar glizennou
 Kaeroc'h ar mor alaouret oll
 Dan abardaes pa guz an heol.

3

BARZ AR MENEZ.

Tud an Arvor ne glevont quet
 Kan dudiuз al laboucet
 Sut ar voualc'h, kan an eostik
 Hini an drasel, ar boc'h ruzik.

4

BARZ AN ARVOR.

Gand e vorzol ag e anve (*bis*)
 Me gred en deus eun tam fouge.

VII

— « Va mean zo mad va falc'h zo lem (*bis*)
 Ne man quet ar c'hal var e drem.

VIII

Assa potret holl 'maomp aman (*bis*)
 Piou vo hirio an diveza.

IX

Abars commans ar c'habiten (*bis*)
 A den e dog 'ra eur beden.

X

Goude tap krog er mean lemman (*bis*)
 An holl botret 'ra evel dan.

XI

Setu an holl filhier o sini (*bis*)
 Assa potret kouls eo kregui.

XII

Er foennog ne ves mui klevet (*bis*)
 Met trous ar filc'hier o redet

XIII

Pa vez an deiz o c'houlaoui (*bis*)
 Ar falc'heurien zo a zrevi.

8

BARZ AN ARVOR.

Ma n'on deus quet a' nneier
Na quement a vokejou kaer
Ar bizin druz dantelezet
Ous on reier ne vankont quet.

9

O valé var an aod guen kann
Dirak ar mor braz a plean
Gand plijeadur me soni bemde
E brasder an Aoutrou Doue.

10

BARZ AR MENEZ.

A c'hui a glev messaerien
O kana joatuz a laoen
En o menesiou o viret
Bandennou braz a loenet.

11

Kaer eo sonik ar mous bian
Pa vez o tont varzu e goan
Gand e vouézik sclear a seiltruz
Araog ma soun an Angelus.

12

BARZ AN ARVOR.

Allaz mignon or soniou-ni
Eo trouz ar goal vor o c'hoari

Mont a reont iou e teu o stré.

XXIII

Evelse tremen an derves (*bis*)
E kreis al labour hag ar pres.

XXIV

Gourvez a ra ar c'heas falc'heur (*bis*)
E gorf brevet gand ar scuider.

XXV

Ancounnac'hat a ra e boan (*bis*)
O tribi kig a fars d'he goan.

XXVI

Eürus an den o labourat (*bis*)
P'en deus feis a bolontez vad.

XXVII

Da Zoue e kinnig e boaniou (*bis*)
E c'huezen hag e labourou.

XXVIII

Er baradoz e tiskuizo (*bis*)
Eur gurunen en deus eno.

LOUIS PAGE.

Droits réservés.

ORFÈVRE

NOT
PAGE 9



Nan n'eo glevomp peurlia
Nemet guelini o lenva
Mes ni gar o c'hlem hirvoudus
Hac o c'hournij troidellus.

5

BARZ AR MENEZ.

Er menez e zeus gues huel
Dhor goudori diouz an avel
E seed bankou or guez dero
En haav or beus disheollennou.

6

BARZ AN ARVOR.

Ma n'on deus ket o woez dero
Guiniz melen zo en or bro
A sourral a reont goustadik
Dindan alan an ezennik.

7

BARZ AR MENEZ.

Daoust a c'hui o peuz foenneier
Marellet gand boquejou kaer
Feunteuniou scler o peuz ive
Dour mad o redet aneze.

**Pa vez o strinka Ionen
Dre ners estlammuz ar wagen.**

13

**Koulskoude or Martolodet
En o bagou a vez clevet
Eur veac'h an amzer o kana
Kantik an Intron Varia.**

14

AN DAOU VARZ ASSAMBLES.

**Kaer an Arvor, kaer ar Menez
Kaer eo hor Breiz, or c'harantez
Hon telennou ne scuizint ket
O kana bro goz ar Barzet.**

15

**A pa vo nijet on Ene
Eus Breiz-Izel varzu an Env
Er Barados c'hoas ni garo
Bro ar rehier hag an dero.**

LOUIS PAGE.

Droits réservés.

Landerneau — Imp. DESMOULINS.